



TALABAO

18

ar gazetenn a ra trouz!



TALABAO, KAZETENN AR VREZHONEGERIEN YAOUANK
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



24,00 L

Talabao, embannet gant An Here
Kazetenn ar vrezhonegerien yaouank



ISBN 0982-8311 — CPPAP 69032
© An holl bennadoù ha tresadennoù gant An Here 1991

Niverenn 18
miz C'hwevrer 1991

TAOLENN

Mojenn : Ar gazetenn e Koad ar C'houk	2	Tarzhig
Bannoù-treset : David	3	Jord ar Meur
Choarioù : Gerioù	9	Martial
Danevell : Fall-foenn evit an tad-kozh !	10	Zulianig Dornegan
C'hoarioù : An torr-penn	12	Tangi ar Menn
Diell : Indiated ar Chompezennoù (II)	13	Brieg ar Menn, Malo ar Menn
Bannoù-treset : David (<i>kendalc'h</i>)	29	Jord ar Meur
Danevell : War ribl ar pleg-mor	36	Paol ar Meur
Biskoazh kement all !	38	Goneri gKersaozon
Diskoulmoù : Eurêka !	39	Tarzhig
Korn ar Fri-Furch	39	Divi
Jobig	40	Erwan

Maketenniñ ha pajennadiñ gant Alan Dipode ha Divi gKervella

AR GAZETENN E KOAD AR C'HOUSK

(mojenn a-vremañ)

Ur wech e oa, ur wech ne oa ket, met ur wech e oa bepred, ur gazetenn gaer-spontus a oa o vevañ e Liorzh ar Brezhoneg hag a strewajoa ha levezec en-dro dezhi; an holl vrezhonegerien yaouank a oa mignon dezhi. Graet e veze *Talabao* anezhi. Hogen, un deiz, e vanas kousket evit un hir a gousk. Tarzhig, he floc'h, petra bennak ma rae e seizh gwellañ ne zeue ket a-benn d'he dihuniñ ha ne ouie ken petra ober. Mantret e chomas e-pad ur pennad betek ma teuas d'e soñj gelver e vreur, Strakig, evit ma teufe d'ober war he zro.

"Ho temata, Tarzhig ma breur, pelec'h emañ ho gazetenn muiañ-karet?"

"Deus ganin, Strakig ma breur. E Liorzh ar Brezhoneg emañ. Kaer em eus ober todion ne zihun ket..."

"O! kaerat ur gazetenn!" eme Strakig, ar from en e vouezh, p'he gwelas.

"Re wir!" a respontas Tarzhig, un daeraouenn e kom e lagad.

Hag an daou vreur da bokat war an taol d'ar gazetenn ledet klok war ar gwele.

Burzhud! Moliac'h! Setu Talabao o tihuniñ en-dro, yac'h, dibistig ha startijenn enni da werzhañ diouzh an druilh.


"Biken ken ne vezi lezet ganimp da gousket! Petra 'lavaromp? Birviken ken pa lavarimp mat..." eme an daou vreurig a-unvouezh.

Ha diwar an deiz-se emaint o vevañ o-zri a-gevret e Liorzh ar Brezhoneg ha meur a niverenn emaint e sell da gaout. Unan bep eil miz da vihanañ, ha goude bep miz!... Youc'houc'hou, tralalal!... Unan bep pemteztez marteze a-walc'h!... Joa ha kaniri e barr ar gwezennoù e Liorzh ar Brezhoneg!!!...

DAVID

Jord ar Meur 89

PA SAVAS GWENN AR BABIG JSKIS-SE D'AR 5 A VIZ GWENGOLOEUS AR BLOAVEZH-SE, E OA PET HENNEZH DA GUZMAT A-DRENN UR PEUL BETOÑS. KEKENT E VEEZAS GWENN NE OA KET UR BABIG HENVEL OUZH AR RE ALL, HAG UR GRIDIENN A REDDS DREZ. A-DROL-TRUMM HE DOE ADN RAK AR BABIG-SE, A SELLE OUTI GANT E ZAOLGASAD BRAS DU, MESKET ENNO SPONT HA SOUEZH.



SOUEZHET E VOE GANT DREMM AMCH'Z AR BABIG. UN DREMM ZENEL E DA, SUR, MET NE DENNE DA NETRA ANAVEZET...



KRIVET GANT AN ANV DIK A ROED D'AR VERZIDI-SE, E STAGAS DA GAUNETA. NE OUE KET REIZH-MAT HA DLEET E DA DEZH DISKLERIAN HE C'HAVADENN D'AR PENNAOUEREZHIOU.



DIV GRIBENN GIG A SANE A-US E ZAOLLAGAD.



NE RAJE KET! SUR MA DA E VJJE LAZ HET AR C'HEMMAD B'HAN GANT AR BOLUS, DROUST D'E NEUZ D'INONZ UR GALON VAT A VADEZ A DA ANEZH.



MOARVAT EO UMAN EUS AR BOUDO-SE A VEV EN TOLEAD BERZET... AN EUZHTUD... AR GEMMIDI!!



NEMET PETRA OUEA GAVAN? E ZOUZ-AMAN, EVEL M' O WOA GRET E DID? N'EN DEFE CHAS ESET... DIODH AN NOZ A VECE AL LODENN-MAH EUS KEBERLEZ EDUANTELEZH AN EUZHASKELEL HAG AR CHAS. HA NE VECE NEMET UN TRAVVA D'AL LOENED-SE, AET DROUK GANT AN NADON DU.



HEP EN EM SONJAL HIRDO'H WAR AR PEZH A RAE, E STOUAS GUENN DA GEMER AR BABIG KULH-SE.



UN TU BENNAK ER PELLOU E VOE LAOSKET UR YUDADENN GANVAOUIS GANT UR C'HI, KEMENT HA DOUGANN SERR-NOZ....



NOZ A DA. AN EUZHASKELEL, ANEZH D'FROUEZH TRELZARNODOU GENEK SKANTOURIEN AR BREZEL MEUR, A DA O TONT ER-MNEZ EUS O C'HEVIU. HAG AR CHAS GOUEZ D'O HEUL, ROGET O BOUTELLOU GANT AN NADON DU. MA VOE LEUNIET AN AER GANT C'HWEZH TRAGUS AR BLEV D'ISEC'HET HA C'HWEZH AN DOURENNOU LOENEL.



SELET A RAE GWENN OJZH AN HEOL O KIJHAT A - DREVV D'ISMANTRU AN TIEZ DIRAPAR.



C'HORNT GOUELAN A SARRS ENN PA SONJAS E TUD HE BRO, KEN LORC'HUS GWEZH HALL, HAG A SARRS BREMAN E LAGEHN AR QUEZON... KROZADENNOU LOENED AN NOZ A DA KROG DA VESTROMAN AN TENVAL.





KOUSK MA AELIG ! KOUSK ! WARC'HOAZH 'Z PO
LAEZH FRESK. KOUSK, AMAN NE 'Z PO KET
A ZROUS.



GOUDE UN NOZJEZH DIGOUSK E IWELAS GWENN AN DEIZ O TARZHAN GANT
PLJADOR. YUDADENNOU HA C'HUEZHOU TRAGUS AN NOZ A OA BET SKUBET GANT AR SAV-HEOL. EN UR VONT E KER E
SONJE-HI ER BUGEL AMC'HIZ E LIV GLASWER. EN HE C'HAERZ E KLOVE N'OUË RE VAT RE LIAMM DON OAZH HE STRAN OSTRAN.



PETRA D'OBEB?
E VAGAN?... E
ZESVEL?...

HA GALLUT A RAE DREIST-
VEVAN ER BED GOUEZ-SE,
MA TEUED DA GREDIN E
OAO KOUSKET KERENT HA
GANET, HET GWELEBET
A ZASAREN ?...



NE OUE KET HA BEV E OA C'HOAZH YOUENI GOZH, AN HINI A WERZNE KEUZ GWEZHALL WAR
A MARC'HALLAC'H. KEIT ALL A OA MA NE OA KET BET O VALE E-TOUEZ DISMANTROU
AR SEVENI D'GEZH A-WEZHALL.





KEMENT ALL A ZARVOUDOÙ A DA RET ABARÉ MA OA-HI EN EM DENNET ER C'HARTERIOÙ DILEZET AL LOURONN C'HLAS HE DDA LAZNET AR BRAZ EUS AR BOBLANIS, BET GWALLGASET DIJA GANT AR BREZEL MEUR HA BLOWEZHIOÙ A GERNEZ.



YOUENN VANNAC'H! TREMEN DEK VIOZ ZO GO MARV! E VAB ON... HA TE? N'EO GUENN GOZH OUT-TE? DONT A RA SONJ DIN E LABOURES EVIT MA ZAD PA OAN MOUS.

RE WIR! TRUGAREZ DEZHI EN DDA GELLET YOUENN FINVIDI KART. NE OA KET PAR DA WENN EVIT NEZAN GLOAN HAG OBER STAMM!

UR GEMENEREZ VAT E OAN GWEZHALL...

STANK DA GLAENN, JOB! PERAK'Z POA C'HOANT DA WELET MA ZAD?

(DA GENDEL'HER P. 29)

GERIOÙ !

Evel petra ?

1. Skragm (pizh) evel
2. Gwiv (laouen) evel
3. Du evel
4. Fin evel
5. Bouzar evel
6. Lart evel

- A. an toaz
- B. ar bleiz
- C. ur c'hant tachou
- D. ur vouarenn
- E. ul louarn
- F. ur c'hleuz

Al lizherennoù a vank...

- | | |
|----------------|---|
| 1. ...O...ENN | plac'h dispered |
| 2. ...O...ENN | bleunienn frondus |
| 3. ...O...ENN | gorre an douar, pe kroc'hen ar c'hig-sall |
| 4. ...O...ENN | n'eo ket brav pa vez faos |
| 5. ...O...ENN | marvailh an amzer gozh |
| 6. ...O...ENN | da bep hini e hini |
| 7. ...O...ENN | gwezenn hep kef |
| 8. ...O...ENN | klefved-red spontus an amzer-wechall |
| 9. ...O...ENN | leuniet e vez da lein |
| 10. ...O...ENN | degemer a ra an alc'hwez |

Ar silzherenn

• Diaes!!! Mesket eo an holl lizherennoù! **B - G - D**

LOUET DREIN DARED PLAEN LAGAD

FALL-FOENN EVIT AN TAD-KOZH !

Dias a-walc'h eo da grediñ ha neozh emañ gwir; ar pezh a gontin deoc'h hiziv a zo gwir penn-dar-benn. Setu an doare :

N'eus ket pell zo, daou vlez zo bremañ me 'gred, e oa degouezhet an dra-se get-un tad-kozh a gornad Roazhon. El raziñ an tadoù-kozh e vourre bras hennezh a gompagnunezh e vugale-vihan ha bepred, el ur "pepe-katev" ma oa, e veze é klask ober plijadur dezhe.

Setu savet soñj dezhañ o c'has da weladenniñ ur zoo, ha, tre-betek hag ober, mont betek unan ag ar re vrapañ, "kosteze Pariz; ur zoo brav get loened distag é veviñ eno en o frankiz. Ne vént ket dalc'het e-barzh kaoudelloù houarn, nann, redek a raont ar o feulzer; ur zoo ag an dibab.

Hir eo an hent met ne zoug ket an tad-kozh konduiñ, adal ma vo gopr d'e boan é welet e vugale-vihan laouen.

Setu-int aet, mintin-mat, ar hent Pariz, tad-kozh, mamm-gozh hag an daou grouadur barr o c'halon get al levenez. Troioù kreisteiz e oa daet naon d'an dudigou-mañ. Ne oant ket c'hoazh degouezhet get penn o hentad met ne vern, pa vez mod-se ne vér ket ur blank tost. Hag an dud da arrest en ur preti, da "voueta koko" el ma lærer.

Ur predig mat, netra da lâret, pep unan é lipat e veg. En un taol e sav tad-kozh; mall e oa mont da "Gérsoulaj" da zizouriñ e avalou-douar rak, ar an hent, n'en doa arrestet tamm ebet.

Aet d'ober ha daet en-dro, digor-frank e

vragichenn. Eñ da azezet en dro ar e gador. Ar vamm-gozh neuze a lâr d'he fried :

"Digor eo ho pragichenn, n'ho peus ket gwelet?"
"Gwir a-walc'h eo, sankrampouezh!... Setu, renket eo an traoù..."

Hag ar pred da genderc'hel. Ur wezh lipet ar c'hafe ha paeet an notenn e savont; kilometroù a chom c'hoazh d'ober ha n'eus ket re a amzer da goll...


KRAK, KRAK, KRAK!...

Razh ar pladoù, ar gwer, razh an traoù kouezhet ar al leur, drailh, bruzhunet, hag an tad-kozh en e sav e-kreiz ar sal get... an doubier tapet e-barzh serrell e vragichenn! An holl dud é sellet doc'htañ ha den trist ebet. Komprenet ho peus moarvat en doa paket un tamm ag an doubier p'en doa serret e vragichenn ha pa oa savet, dam, e oa daet getañ razh ar pezh a oa ar an daol.

Oc'hpenn dezhañ en em gavet el ur glep dirak an holl e oa bet ret dezhañ paeñ an drailh, an ostiz, bouc'h den, ne c'houlenne gouiet netra. Setu un "notenn" troet da vout ur "bounnerenn".

Ha ne oa ket echu an devezh!

Erru er zoo. Er zooioù seurt-se e rank an dud chomel en o c'harr, fenestroù serret, peogwir emañ al loened en o frankiz, n'int ket dalc'het ha kaer zo lâret, ul leon n'eo ket ur c'hi-madam. Aet tad-kozh get e garr neuze da welet ar frikorneged, an tigred, ar jirafenned... Mat-kaer an droiad betek ma ne gavas un olifant netra gwell d'obet evit poueziñ get e revr bounner ar diardrefiv ar c'harr. Setu bloñset ar



*SEKEME (OLIFANTEG KRENN) = N'EO KET BET GRAET AN TAOL VIL-SE GENIV.

c'hastell-karr ha bloñset mat. Un tangarr nevez-prenet dezhañ. Ha tad-kozh é tiframmiñ e vlev gwenn get an digalon hag ar gounnar met petra lâret ur wezh graet an droug!

"Atav evit ar zoo emañ echu ha n'on ket tost da zont en-dro, mil mallozh ruz. Biken ne lakain ma zreid en ur zoo..."

Divosigernet get ur mekanikour, ur chekenn da hennañ c'hoazh hag an dud d'ar gêr. N'eo ket kement-se e oa bras an drailh met "re zo re". Den ebet é komz en oto nemet an tad-kozh é tiskarg e galonad kounnar. Konduiñ a rae fonnañ, el pa raer pa vér arfleuet ha ne vehe ket bet brav d'ar vamm-gozh goulenn getañ sevel e droad ha mont difonnoç'h. Mall e oa dezhañ pellaat a-zoc'h ar zoo milliget-se!

"Aotrou! Ho paperioù, mar plij genoc'h, ha re ar c'harr..."

"..."

"Gouiet a rit e oac'h da 160 km an eur?"

Hag ar jandarmed da ensellet ar c'harr :

"Ha petra eo ar stok ho peus bet aze a-drefiv; ur

gwallzarvoud?..."

"Un olifant, ya, un olifant en deus kemeret ma c'harr evit ur gador."

"Hama, diwallit, ma den mat, ne garomp ket ni e ve graet goap ac'hanomp el-se! Hag evit komañ oc'h 'vont da vouññ er volotenn : — Martin, degasit un alkotest d'an aotrou-mañ."

P'en doa tostaet ar jandarm Martin get ar "biniou" e oa bet letaet a gement anv vil a zo :

"Penn-kaol! Pantekouilh! Laer-e-voued! Kaldoch! Kole Porzh-an-Dro! Penn-yod!..."

Ha re 'rall c'hoazh, ne oan ket eno, met tu zo da grediñ e oar un den 60 vlez ur bochad muioc'h a douiadennoù evit unan 30 vlez.


Fall foenn, fall foenn evit an tad-kozh! Oc'hpenn an drailh er preti, an olifant er zoo hag ar mekanikour ar-lerc'h, e oa bet ret dezhañ paeñ un dell-gastiz evit bout aet re fonnañ hag unan arall evit bout letaet daou jandarm en embreg o c'harg!

Petra 'faot deoc'h, un devezh chañs e oa.

AN TORR-PENN

• Klaskit klokaat pep heuliadenn gant un niverenn pe ul lizherenn en un doare kempoell :

1. 2 3 4 9 16 81 ...
2. 0 1 2 10 11 12 20 21 22 30 ...
3. 0 1 1 2 4 7 13 ...
4. 3 A 4 E 1 O 2 B B A E E A O ...
5. 5 3 2 6 4 2 12 8 4 20 7 ...
6. O K Z M T I R B Z E O H E N ...
7. 12 16 4 3 15 12 5 9 4 6 9 3 8 12 ...
8. K D E E N M A A V T ...
9. 35 22 44 56 ...
10. U 1 N D 2 U T 3 I P 4 R P ...
11. A V F K B K E V Z K B K I V O ...
12. S E G H U L U H G E ...
13. K D M M H S S Z K Z A Z ...
14. 4 2 2 9 3 3 8 4 2 6 2 ...



(An diskoulmou p.39)

TANGI AR MENN ■

DIELL

Indianed ar C'hompezennoù (II)

skrid gant Brieg ar Menn
tresadennoù gant Malo ar Menn



Evit ma ne gouzthle ket ar vugale vhanaf e-kerz ar veaj e vezent lakaet e-barzh ur gaoued savet war ur c'hravazh

E niv. 17 Talabao hor boa bet tro d'ober anaoudegezh gant pobloù indian ar C'hompezennoù... En niverenn-mañ e vo komzet diwar-benn o sevenadur hag o istor, ha gwelet a raimp petra ez int deuet da vezañ hiziv an deiz.

Sevenadur Indianed ar C'hompezennoù

Ar gevredigezh

Pep pobl – pe pep skourr eus ur bobl (evel an Oglalae e-touesk ar Sioud da skouer) – a veze enni meuriadoù diazezet dre vras war ul higne-tud ha renet gant ur penn-meuriad. D'an hañv en em vodent ha staliet e veze ar c'hamp en ur c'helc'hiad divent a dipioù, Tipi ar Chuzul o vezañ e-kreiz.

Gwerinel* e oa dre vras urzhiadur ar gevredigezh, ha dilennet e veze ar pennoù-meuriad pe lakaet d'ar garg-se dre hêrezh – gani m'o dije prouet o barregezh. Diforc'het e veze ar benngadourien hag ar pennoù en amzerioù peoc'h, kargoù resis-tre gant pep hini anezho. E kamp-hañv ar Cheyened da skwer e veze kontet, diwar ur boblañs a 3 500 den, 11 meuriad ha 44 fenn, 4 anezho a-us ar re all.

Urzhiet e veze ivez ur bobl dre genvreuzioù, lod evit merc'hed (reoù relijiel hag arzel) ha lod all evit

*gwerinel : ar galloud o tout eus ar bobl



paotred (relijiel ha brezelek); alies e vezent skeulrenket dre oad ha barregezh. Bezañ eus ar genvreuziezh-mañ-kenvreuziezh a veze aroueziet gant an doare d'en em wiskañ, da gempenn ar c'hoefoù-stuc'h, da livañ an dremm, hag all. E-touez ar c'henvreuziezhioù brudetañ e kaved hini "an Holl Gamaladed" troatuek ha hini "an Dud Kontrol" cheyen : ar Cheyened-se a rae ar c'hontrol-mik eus ar pezh a veze graet gant an dud ordinal (asatifiñ e-lec'h nac'h, mont war-gil e-lec'h mont war-raok, h.a.); n'eo nemet e-kerz an emgannoù e raent an traoù gant reizhpoell*.

Priziet e veze pinvidigezh an dud dre ar madoù, niver ar c'hezeg, ar fuzuilhoù hag a-wechoù ivez niver ar gwraez rak ledet e oa al lieswregiezh.

Pa veze en em lakaet daou amourouz a-du da zimeziñ ez ae ar paotr d'ober ar goulenñ-eured ouzh tud ar plac'h en ur brofañ madoù dezho, kezeg peurvuiañ.

Moumounet e veze ar vugale. Souezhusat giz a oa miret ar gorden-vegel en un divilhon* ouzh kavell pe gouzoug ar habig - d'an tilsam-se e veze roet stumm ur vaot pe ur glazrd gant ar Sioued ha stumm un naer pe un touseg-kornek gant an d'Troatueged. En o bugaleaj, ha dreist-holl en o oad-krenn hag en o oad-gour, e c'halle ar baotred cheñch anv. Abred-tre e veze lakaet gant o mammoù ar merc'hed da zeskiñ ha gant o zadoù eo e veze kenteliet ar baotred war an hemolc'hin, war ar marc'hegezh, kement-se holl a-raok mont e-barzh ur genvreuziezh bennak.

Ar c'hoarioù

Choarierien touet eo an Indianed. A-raok ober gant ar c'hoarioù kartoù e kemerent o flijadur gant diñsoù ha divinadelloù. E-touez ar c'hoarioù ampartiz e kaver ar redadegoù-kezeg, an tennadegoù gant gwaregoù, ha dreist-holl ur seurt c'hoari horell (c'hoari *la crosse* e vez graet dioutañ e saozneg, diwar ar galleg anat eo...).

A-raok kregiñ gant ar c'hoari-se e veze dañsoù relijiel war an dachenn-c'hoari ha neuze e veze rannet ar wazed etre daou strollad. Evel gant ar c'hoari bazh-dotu e veze ur vazh-kamm gant pep hini. Ret e veze da bep strollad kas ar volotenn e-barzh pal

reizhpoell : doare reizh da ober ha da soñjal.
divilhon : tra a-istrukiñ

an enebidi (heñvel ouzh paliou mell-droad, met strishoc'h ha div wech hanter bennak uheloc'h). Taer-spontus e veze ar c'hrogadoù dre ma veze kantadoù a c'hoarierien — betek c'hwec'h kant a-wechoù! — ken taer ma c'halle tud zo bezañ lazhet pa veze div bobl disheñvel o kenstrivañ. Pevar c'hoziad a veze o varn an abadennoù hag i eo a verke ar poentoù betek ma vefe tizhet 100. E-skeud ar c'hoari e veze kloustreet kenañ, kezeg hag armoù dreist-holl.

Kement bugel a oa a c'hoarie gant kornigelloù. Gant ar merc'hed e veze merc'hodennoù ha kavelloù bihan; ar baotred avat a c'hoarie brezelig gant gwaregoùgou ha saezhoù diveg.



C'hoarier "Lacrosse" (skeudenn gant Catlin)

Ar relijion

Evel an holl Indianed dre vras o deus Indianed ar C'hompezennoù un doujañs hag ar garantez donkenañ evit an natur.

•Ni, an Dud, a vev a gempouez gant al loened, al laboused hag ar plant rak an holl vodoù zo bugale diwar ar memes Mamm, hag ur Spered-unan eo an Tad. Setu komzoù an Oglala Hehaka Sapa (Karv Du) — displegañ a reont mat-tre spered ar relijionoù indian. Mar fell deoc'h gouzout hiroc'h diwar-benn karantez an Indianed evit an Douar hoc'h aliomp da lenn *Diar'chen war an Douar Nevet**, un dastumad

nevet : sakr



Framm ul logell-c'hweziñ : pa veze echuet ha sevel e veze gobet gant krec'hin.
A-raok mont ul logell e veze padet dirak ar c'hloapenn bizon.

prezegennoù indian ha luc'hskeudennoù tapet gant Edward S. Curtis.

Wakan Tanka ("Ar Spered Kevrinek" e sioueg), daoust dezhañ bezañ "unan", a vez rannet e pevar c'horn : an Hanternoz, ar Sav-Heol, ar C'hreisteiz hag ar C'huzh-Heol. A-drugarez d'ar c'horn-butun e c'hall an Indianed kejañ gant ar C'hrouer; ar butun o vezañ ar blantenn nemeti gouezet gant ar gantreerien.

Ar c'helc'h zo un arouez sakr, hag evit-se eo e vez kelc'hiek an annezlec'hioù, ar c'hampoù-hañv, h.a. Ar c'horn-butun sakr ha relogoù priziusañ ar meuriad a veze miret en ur sach-louzoù diwallet gant ar beleg-mezeg; er sach-se e veze tu da gavout krec'hin, klopennoù, butun, binvioù ha traoù all a bep seurt.

E pep tennad o buhez pe pa vezent klañv ez ae an Indianed d'ul logell-c'hweziñ (*onitakhe*, "sweat lodge" e saozneg) da c'hlnaat. Eno e veze skuilhet dour war mein tomm-berv ha goude ur pennad preder en aezhenn ez aent er-maez da splujañ e-barzh ur stér, ha pa vefe hañv pe c'hoañv.

Setu lidoù pennañ Indianed ar C'hompezennoù :
- **Dañs an Heol.** Dibabet eo bet an anv-mañ rak

graet e vez "An Dañs ma Seller ouzh an Heol" anezhi e sioueg, met anvioù disheñvel zo gant ar pobloù all. Eizhtez e pade al lidoù, e miz Gouhere peurbesañ, hag en devezh diwezhañ e veze ar gouel en e barr : ouzh son ur c'hwitell kizellet en un askorn ez ae an dañserien war-raok tro-dro d'ar wezenn sakr, pep hini anezho stouet en a-dreñv hag o terc'hel en e sav a-drugarez da lereñnoù hir stag ouzh ar wezenn a sach'e er penn all war ibilioù koad fichet e kig e vruched. Kenderc'hel a rae an dañserien da dreñf betek kaout ur weledigezh.

Okepa a ra ar vMandaned eus al lid-se, ha ganto e oa taeroc'h c'hoazh : skourret e veze al lereñnoù ouzh framm ubelañ diabarzh al logell ha lakaet e veze ivez klopennoù bizoned da sachañ war kigennoù an divhar hag an divrec'h war-bouez lereñnoù hag ibilioù. E diwezh al lid e roe lod eus ar re yaouank hini pe hini eus o bizied da vezañ troc'h evit trugarekaat ar Spered Meur da vezañ roet kalon dezho da zerc'hel penn betek ar weledigezh.

- **Azeul ar Peyotl.** En un annezlec'h en em vede un nebeud dalc'hidi evit deñriñ war an ton bras



skajennoù se'h eus ar c'hebell-touseg a vez graet *peyoti* diouto, hag a ro skoazell d'al lidourien da gaout gweledigezhioù. Eus Mec'hiko e teue an azeul-se, ha skignet e voe gant pobloù kreisteiz ar C'hompezennoù adalek 1840. Darn eus ar pobloù a yeas warnañ a-raok dibenn ar c'hantved.

- **Dañs ar Speredoù**, "Ghost Dance" (Dañs ar Spes) a vez graet anezhañ e saozneg. Sevel a reas ar relijion-se diwar dic'hoanag an Indianed, pilet gant ar re wenn ha bac'het en o mirvaoù. Diouganañ* a rae Wovoka — Jack Wilson a veze graet dioutañ gant ar re wenn! —, un Indian paiut, distro ar bizoned hag argnivelezh ar pobloù indian. An hevelep traoù a veze diouganet gant an dañserien en ambren; brezelgar e teuas al lid-mañ da vezañ gant ar Sioued.

Gant ar skwerioù-mañ e verzer mat pouez ar

diouganañ : lavaret en a-raok ar peth a c'hoarveso.

gweledigezhioù er relijionoù indian.

Pa varve ur brezelour e veze gwisket e gorf gant e zihad kaerañ, tamolodet en ur c'hroc'hen bizon ha ledet war ur chafod koad, lidlazhet e veze e wellañ kezeg da heul. E wreg (pe e wragez) a droc'he he blev hir evit diskouez e oa e kañv. Ha keit ha ma tistroe ar c'horf d'ar Vamm Douar da vreinañ e nije an ene etrezek Baradoz an Hemol'hoù Peurbadel.

Ar c'hezeg

Gant donedigezh ar c'hezeg e voe ur c'hemm divent e doare-bevañ an Indianed. A-raok e oa ar chas al loened doñv nemeto anavezet ganto hag i eo a sache war ar c'hraevazhioù a veze mentet diouzh o nerzh. Ar c'hezeg, i, a c'halle dougen hammoù kalz pounneroc'h; diwar se e c'halle an tipiù bezañ brasoc'h ha frankoc'h. Gwellast e voe ivez diwar neuze stad ar merr'ched a c'hallas tremen muioc'h a amzer gant al



Dañs an Heol gant ar Vandaned (Skouldenn gant Catlin)



labourioù arzel. Roet e voe ul lañs nevez d'ar c'henwerzh ha d'an eskemm etrepoblel. Ha gwir urzhioù marc'heien a zispakas ivez.

Deuet e oa ar c'hezeg da vezañ pinvidigezh ha frankiz an Indianed, evel ma oa ar bizoned o bevañs. Evit-se eo e lazhas ar re wenn 1.500 penn-kezeg bet kemeret digant ar gKomanched, ar gKiwaed hag ar Cheyened bet trec'het en emgann Palo Duro Canyon e 1874. Hiziv an deiz e klasker tapout krog er c'hezeg gouez (*mustang*) diwezhañ evit ma ne vefe liamm ebet etrezo hag ar re zoñv.

E 1876, da-gerver emgann Little Big Horn, e voe kontet etre 20 ha 40.000 penn-kezeg evit ar Sioued hag ar Cheyened — da lavaret eo etre 10.000 ha 15.000 den, 3.000 brezelour en o zouez. Ar Fritoulleged a oa skignerien kezeg : soñjit 'ta ez eus bet kontet 50 marc'h evit pep tipi!

Tro-dro da vruched ar marc'h e veze ur gordenn evit chom stabil hag unan all hir a chome da stlejañ war an douar gant aon ma kouezhe ar marc'heger :

evel-se e c'halle adaptout e varc'h hep bezañ flastret.


E penn kentañ e kave d'an Indianed e oa ar c'hezeg chas bras, ha sevel a rejont evito anvioù a denn d'ar ger "ki" : "ki sakr" e lakotaeg, "ki-eln" e trostueg, "ki tev" e krieg, hag all.

Ar bizoned (pe ejened-moueek)

Bison bison americanus eo o anv skiantel (*buffalo* en amerikaneg). Ar par (*tatanka* e lakotaeg) a c'hall redek betek 48km/e daoust d'e bouez, etre 1.000 ha 1.250 kg. Un tamm mat skañvoc'h eo ar barez gant he 650 pe 750 kg. Evit gwir ez eus daou seurt bizoned e Norzhamerika : re ar C'hompezennoù ha re ar C'hoadoù (*Bison athabascæ*) hag a zo un tammig bihanoc'h. Betek 25 bloaz pe 30 vloaz e c'hallont bevañ.

Kontet e vez gant an Indianed e oa ar bizon kentañ ul loen espar ha gwenn-kann. Diwar ar vojenn-se e veizer talvoudegezh espar ar bizoned gwennard :

Ar bizon : diazez bevañs Indianed ar C'hompezennoù





louzaouiou dreistordinal a veze roet gant o c'horf, hervez.

An hemolc'h a vode e-pad an hañv, koulz al lidoù relijiel, ar gouelioù, eskemmoù hag an euredoù, holl veuriadoù ur bobl. Da geñver an degouezhoù-se e veze kig fresk eta (goude ur goañvezh kig sec'h - pimekan en algonking, ha "pemmican" e saozneg diwar ar ger indian). War tachenn ar chase e veze debret a-wechoù an avuoù, kriz pe domm, ar pezh a zegase kalz eus ar bevaennoù* a oa bet diouer anezho.

Estreget hemolc'hin e veze da ober avat, rak ne oa ket diant al labour, dreist-holl evit ar merc'hed : dont a raent da vevañ diskroc'henezed, kigerezed, kivi-gererezed, kemenezezed...

Dañs an Ejened a oa un doare pedenn da c'houlenn ma vefe frouezhus an hemolc'h. Ne veze ket lazhet gant an Indianed muoc'h a ejened eget n'o doa ezhomm, ha trugerekaat a raent al loened evit o aberzh. Reolenet e oa an hemolc'hadeg gant lezennoù strizh-kenañ ha pep tra a veze divizet en a-

bevaenn : vitaminoù.



Ur roched tritoullek giz-kozh gant war-dro 1830 gant daou groc'hen wapti. Gwelit e vez ar bandennoù broderezh quill heverk eus an amzer-se.

raok : an niver a ejened da lazhañ, pere, penaos ober evit ma ne dec'hfent ket kuit, evit ma ne bennfollfent ket, hag all. D'ar marv e c'halle bezañ barnet ar re a yae a-enep al lezennoù hag ar pezh a oa bet divizet, dre ma oa buhezioù ha dazont ar bobl e kont.

Implij ar bizoned

Gant ar c'hig e veze graet skejennoù tanav a veze lakaet da sec'hañ en heol; bruzhunet e vezent da c'houde ha mesket ar boutrenn gant druzoni-deuz ha hugennoù (lus...). Setu penaos e veze fardet ar pimekan a-raok e lakaat e-barzh bouzellou peur-stanket gant soav. Pividik a-walc'h e oa hevelep boued : 3 500 kalori dre lur. Un trifarzh lur a veze debret gant un den evit e zevezh, hag ar boued nemetañ, pe dost, e oa e-pad ar goañv.

Al lazhadeg

A-raok ar bloaz 1800 ha oa war-dro 60 milion a vizoned o kantren dre ar C'hompezennoù, C'hoar-vezet 'z eus bet gant Indianed-zo chom da arvestiñ e-pad meur a zevezh ouzh bagadoù bizoned o tremen



diehan dirazo! E 1865 ne vane ken nemet 15 milion anezho.

E 1869 e taouhanteras linenn-houarn an *Transcontinental* ar C'hompezennoù, ha degas a reas d'he heul leun a hemolc'herien, evel William Fredrick Cody. Hemañ, "Buffalo Bill" e lesanv, a voe lazhet 4 280 bizon gantañ e-unan a-benn magañ implijidi an *Union Pacific*. Lazhet e vezent alies gant ar re wenn evit o c'hrec'hin hepken, hag evit o zeodoù; ar peurrest a veze lezet da vreinañ. Aozet e veze beajoù dre dren ma veze tennet war an ejened eus ar bagonioù, evit ar blijadur, evel pa vije an ejened c'hweshigelloù e Foar 'n Nec'h Montroulez...

E 1885 e voe tapet ha miret 500 loen bennak gant rancherien boellek evit saveteiñ ar ouenn. Hiziv an deiz e c'haller gwelet ouzhpenn 10 000 bizon er Stadoù-Unanet ha 15 000 e Kanada. Met petra eo 10 000 pe 15 000 e-skoaz tri-ugent milion?

An arz hag an ijin

Etre 1800 ha 1850 e oa degouezhet ar C'hiz Kozh (*Old Style* e saozneg) en he barr. Ar pep brudetañ enni eo hep mar ar pikoù heurc'hin-reunek livet, pladet, gwriet stok-ha-stok, d'ober tresadennoù - gant korzennoù pluennoù e veze graet kement all ivez. An

doare broderezh-se, a vez graet *quill* dioutañ, n'eo ket tra an Indianed nemetken, met ganto eo deuet ken brav m'eo heverk eus arz ar C'hompezennoù.

Etre 1850 ha 1880 e voe un emdroadur don en arz gant implij perlez liesliv prenet diwar eskemm gant ar re wenn.

Kinniget e voe d'an Indianed un doare pivi-dikoc'h d'ober sturdresadennoù mentoniel, d'o c'henaozañ evit displegañ dre arouezioù al liammoù sakr a zo etrezo hag ar bed. Ar *C'hiz Nevez* (*New Style*) e voe neuze.

Goude 1880 e krogas arz an Indianed da vont da get dra ma kase an dic'hoanag o ijin kuit.

Ur gerig diwar-benn an dafisoù : enep ar pezh a c'hallfed krediñ o sellet ouzh ar filmoù "western" ez eus pazioù resis en dafisoù indian, ha n'haller e tu ebet jestraouif na lammat n'eus forzh penaos!

Al livadurioù-dremm, ar c'hoefoù-stuc'h

Gwechall-guzh e veze livet o dremmoù hag o minoù gant an Indianed evit o gwareziñ diouzh an avel, an erc'h, an amprevaned, hag all. Goude eo bet kemeret gant al livadurioù ur perzh arouezel evel ar c'hoefoù-stuc'h, met siwazh n'eo ket anavezet mat ganimp ster an holl anezho.



1. Koel-stuc'h an Omaha-mañ zo bet graet gant blev an heurc'hin-reunek livet a ruz. Gall-tetival eo e zremm ha ruz ar roulennoù, koulz hag e zivskouarn hag e gorf, evit diskouez en deus lazhet un enebour n'eus ket ket-se.

2. Hennañ zo un Arapaho en deus lelet dezhañ arouezañ an narzh hag ar primder o livañ e zremm e gwer, e gelañnoù hag e regenn e ruz, an hantgerelch (evit an oabl) hag al luc'hedennoù e meken.

3. Livioù gouel eo ar re a zo gant ar vaouez siou-mañ - ruz-tan eo ar c'helc'hoù hag he regenn.

4. Ur penn siou minikonjou eo : diskouez a ra e zaoulagad hag e zivjod livet e ruz ez eo distroel eus an emgann gant kalz a skalpoù. Ar c'helc'hig ruz a lavar eo bet glozet en e dal. Ar geunedennig ruz en e vlev zo arouez e walc'h fluzh : lazhet en deus un enebour gant un tenn. Ar blienn divarvet (nemet er penn) zo evit lavaret ez eo-erñ an hini kentañ en deus dizobet an enebourien ha galvet d'an ewezh : ar blienn troc'hel en he beg a ziskouez en deus lveret (troc'hel e c'houzoug d') un enebour, ar blienn goltc'hel a lavar e oa bet ar pevare o touchañ unan en un emgann kent.



Ar yezh dre jestroù
Evit liammañ darempredoù etrepoblel e oa bet ijinet gant an Indianed.

Skeudennus-tre e oa ar jestroù, diouzh ijin pep hini e oant er penn kentañ met daoust dezho bezañ deuet diouzh diviz e chomjont skeudennus. Evit

jestrañ ar pezh a felle dezho lavaret ez implije an Indianed o daouarn, dreist-holl an hini dehoù, a-rez gant o bruched hag o fenn. Barrek gant e zaouarn e oa ret bezañ, rak buan-buan e veze graet ar jestroù, ha lod anezho a oa damheñvel ouzh lod all! Sed amañ un nebeud skwerioù :




Soudard gwenn



Goulenn



Fulor



Trugarez

Ar skrivadur dre dresadennoù

Dre dresadennoù e veze kontet an darvoudoù pouezus. Mennozhioù eo a veze treset, ha n'eo ket sonioù, setu e oa tu d'un heuliad tresadennoù bezañ "lennet" e n'eus forzh peseurt yezh, dre ma teue an

tresadennoù da vezañ mui-oc'h-mui diouzh diviz. Marteze e oa ar skrivadur indian egin* ur gwir skrivadur etrevroadel, piv 'oar?

Er skwerioù da heul e weler an ere etre ar yezh dre ar jestroù hag an doare da skrivañ :



Kozh



Peoc'h



Breur



egin : diwan



Ar brezelioù


Ar brezelioù hengounel

Ar re a veze etre ar pobloù indian an hini ez int : skrapat kezeg, madoù, merkañ taolioù bazh (counting coup e saozneg) ha lazhañ enebourien evit kemer o skalp. Gant se e kave ar vrezelourien tro da ziskouez o c'hardarded, dreist-holl en emgannoù krog-ha-krog gant goustilhoù hag ivez pa zeuent a-benn da stokañ un enebour bev gant ur vazh (counting stick) e veze kontet un taol. O goasioù-stuc'h hag o livadurioù-dremm a oa o roll degas da soñj eus o c'harrioù ha diskouez o ampartziz d'ar brezel.


Evit kemenn a-bell ez implije an Indianed

arouezioù-moged o tont er-maez, dre un toull aes da stoufañ-distoufañ, eus ur biramidennad diskour-rachou gwez gant geot leizh en he c'hreiz. Gant ar Sioued e talvezze ur goumoulenn kement ha "diwallit!", div goumoulenn "mat pep tra", ha teir "skoazell dimp!". A-hend-all e veze roudoù a bep seurt, lod kuzh ha lod all war-wel : da skwer ez arouezie un tomahawk (pe ur bir) ruz e-kreiz an hent un disklêriadur emgann pe c'hoazh an difenn da vont pelloc'h.


A-wechoù en em ginnige pep tu dre e ardamez jestrek. Peurliesañ ne veze ket en tu-hont da zek brezelour e pep argadenn ha pa veze re anezho e veze dibabet kevezourien, dezho da stourm kenetrezo,




Ur goufese



Peangodoù-brezel



Un tomahawk-kara-behin e honara (verebet gant marc'harourien vena (an troad a so bet graet gant an Indian)')



Stikioù-troc'h (counting sticks) evit gouest peozioù



keit ha ma chome ar peurrest da arvestiñ outo. Goude an emgann ez ae pep kostezenn kuit diouzh he zu.

Diwar se e komprener e oa ar brezel un doare c'hoari, unan kriz evel-just, met ne oa ket e spered an Indianed gouennlazhañ* o enebourien; alies zoken e skrapent merc'hed evit ober sklaved pe gwraez anezho ha bugale evit o desevel evel pa vijent bet o re. Ha dreist-holl ne vije ket deuet d'o spered aloubiñ bro pe vro a vefe bet tud enni.

Ar brezelioù ouzh ar re wenn

Kemmet eo bet gant an Indianed o doare da vrezeliñ pa oa bet komprenet ganto e teue ar re wenn d'o skarzhañ kuit gant armoù spontus hag ur skiant-vrezel ne oa nemet havoni* evito.

Choazh pa veze fuzuilhoù-untenn e c'halle an Indianed argadiñ d'ar poent ma veze karget ar fuzuilhoù dre o beg met gant ar fuzuilhoù-tennata e veze ret dezho chom hiroc'h amzer tro-dro d'ar c'hreñvlec'h pe d'ar charreadeg. A-drugarez d'an armoù-se e c'hallas zoken un nebeud diskroc'henerien d'erc'hel penn ouzh 600 pe 700 Komanch ha Kiowa kaset gant Kwaina (Quanah Parker) e 1874 en Adobe Walls.

gouennlazhañ : lazhañ pe klask lazhañ kement den eus ur ouenn bennak (ha dre astenn, ur bobl, ur meuriad, h.a.).
havoni : digalbonegzh.



Staed siou



Staed kumach



Staed sashon

Un tun-brezel indian anavezet-mat a oa oberneuz da dec'hel ha kas e gwirionez o enebourien o oa o redek war o lerc'h en ur spi-brezel; daoust d'an taol-se bezañ brudet-mat e voe touellet meur a ofiser gwenn gantañ. Muioch diouzh o doare stourm e kave an Indian tagañ marc'hegielz an arme. Enket da bleustrañ hervez skiant-vrezel o enebourien e krogjont da vont a-wechoù war droad evel ma voe gwelet en emgann Little Big Horn.

E-touez anaoudeien* an arme e veze kavet alies Arikaraed, Pawnieed, Cheyened hag Apsaroked, an holl anezho enebourien d'ar Sioued ha da bobloù all; "chas melen" a veze graet anezho.

Diaes e veze d'an arme tec'hiniñ da vat war ur bobl a-bezh e-pad ar goañv dre ma'z ae pep meuriad diouzh e du; en enep e lakaset ar c'houlz-bloaz-se ha morz an Indianed da dalvezout evit tagañ o c'hampoù. Evel-se e c'hoarvezas an teir lazhadeg pennañ : e Washita River, Yellow Sand Creek ha Wounded Knee.

Pouez eo memes tra gouzout eo bet lazhet gant an alkohol hag ar c'hleñvedoù-red kalz muioch, a-bell, a Indianed eget gant ar brezelioù.

Ar skalp

Ur brezelour akuit n'en doa ket pell evit distagan

anaoudeg : en arme, den a ya dirak an arme da welet pelec'h emañ an enebourien ha da ziskouez an hent.

ur skalp : a-walc'h e oa tapout krog, gant an dorn kleiz, en ur guchennad-blev, skejañ gant ur gontell ispisial ar penn en ur c'helc'h ledan evel ur palv ha neuze displegañ an dornad blev o sachañ warnañ gant ar genoù. Ne bade ket an abadenig-se en tu-hont d'ur vunutenn gant ur paotr gourdon.

An dra-se ne veze graet nemet gant tud varv; skalpet e voe koulskoude tud a-rae van da vezañ marv evit chom hep bezañ lazhet!

Hervez kredennoù an Indianed ne c'halle ket ur brezelour skalpet mont d'ar baradoz peogwir n'halle ket ar Spered Meur sachañ warnañ war-bouez e vlev. Setu perak e lakae bec'h an Indianed da zegas en-dro ganto o re varv, hag evel-just ar re c'hloazet.

Gant ar re wenn eo e oa bet ijinet an tu-se da broññ laz un Indian; implijet e voe neuze d'o zro gant an Indianed ha skourret e veze ar skalpoù ouzh an tipioù, ar goañvoù, ar skoedoù, ar gwiskamantoù h.a. evel merkoù enorus.

An deiziadoù hag ar bloaziadoù pennañ

A-raok 1855 ne voe nemet krogadoù bihan.

- 1858 ha 1859 : daou drec'h bras gant van Dorn war ar gKomanched.

- 1862 : taol-kilpennerzh Sioued ar reter kaset gant Branig (*Little Crow*). D'ar Gwener 26 a viz Kerzu e voe krouget 38 kilpenneg.

- D'ar Meurzh 29 a viz Du 1864 : lazhadeg ar c'hampad Cheyened gant an arme e Sand Creek.

- 1866-68 : brezel ar Sioued kaset gant Koumoullenn Ruz (*Red Cloud*), ar penn nemetañ bet gounezet gantañ ur brezel a-enep ar re wenn peogwir e voe doujet d'e c'hoantoù (kreñvlec'hioù dilezet), daoust ma ne drec'has ket penna-benn war an arme.

- 1867 : emglev Medicine Lodge sinet gant Komanched, Kiowaed ha Cheyened.

- D'al Lun 27 a viz Du 1868 : lazhadeg Washita River. Taget e voe ur c'hampad Cheyened gant Custer en doa heuliet roudoù lezet gant un nebeud brezelourien o tistreiñ diouzh ur breizhadenn. Diouzh ar mintin e c'hoarvezas

an argadenn daoust ma oa an Indianed-se dindan gwarez emglev Medicine Lodge. Ar wech-se ne dreuzvevas ket ar paour-ksezh penn Gaoater Zu d'al lazhadeg (da hini Sand Creek en doa graet).

- D'ar Sul 25 a viz Even 1876 : emgann Little Big Horn; distrujet e voe penn-da-benn arme ar jeneral Custer. An trec'h indian brudetañ ez eo.

- Eus ar Sul 17 a viz Even d'ar Gwener 5 a viz Here 1877 : tec'hadeg ar Fritoullaged, kaset gant ar penn Jozef, etrezek ar C'honada.

- 1878 : tec'hadeg Cheyened an Hanternoz diouzh o mirva evit distreiñ d'o bro. Touellañ a rejont ar re a oa o redek war o lerc'h e-pad pell met ret e voe da strollad Kontell Zall (*Dull Knife*) en em zaskoriñ en abeg d'an naon, d'ar yenijenn ha d'ar skuizhder. Daoust dezho bezañ klozet ha lezet da vervel gant an naon e Fort Robinson e nac'hent distreiñ d'o mirva. Un nozvezh, e-kreiz ar goañv, e tec'hjont diouzh ar c'hreñvlec'h; ar re na voent ket lazhet pe tapet gant ar soudarded a voe kavet o c'horfoù skornet an deiz war-lerc'h. Ur gwall vrud e voe evit an arme hag aotreet



Bleizig (*Little Wolf*) ha Kontell Zall (*Dull Knife*) : Pennoù Cheyened an Hanternoz; kemeret o doa perzh e tec'hadeg skrijus 1878





e voe ar re o doa treuzvevet ha d'ar strollad kaset gant Bleizig (*Little Wolf*) distreiñ war o douaroù er Black Hills.

— 1885 : dispac'h ar gKried, ar vBoungied hag ivez ar vBois-Brûlé (Koad Losket), hironed anezho. Sparlet taer e voent gant Stad Kanada.

— D'al Lun 29 a viz Kerzu 1890 e voe reuziet ar vMinikonjoued (Sioued) gant lazhadeg Wounded Knee. Daoust ma oa bet lazhet Tarv Azezet (un tabut a oa bet etre ar Sioued o doa e bedet evit Dañs an Heol hag ar boliserien indian karget d'e gas ganto), e vane un tamm spi gant an Indianed. Aon a oa gant an arme rak un emsavadeg nevez hag evit-se e tegouezhjont e kamp Sioued ar penn Troad Bras (*Big Foot*) evit o diberc'hennañ diouzh o fuzuilhoù. Stallet he doa an arme kanolioù buket war ar c'hamp ha mezv e oa ar soudarded; setu, pa glevjont un tenn (ne voe nemet unan), ha peogwir e oa bet gwelet ganto n'asante ket an Indianed reiñ o armoù, e krogjont da dennañ warno.

Aet e oa ar 4 000 kilpenneg siou diwezhañ d'ar Bad Lands da guzhat gant aon rak an arme met en em zaskoriñ a rejont d'ar Gwener 16 a viz Genver 1891. Echu e oa neuze d'ar brezelioù er C'hompennoù.



Kwana (Owanah Parker)
Ar penn komanch anavezatañ

Dibenn ar Frankiz

Amañ e kavot abegoù dic'hoanag an Indianed ha fin o doareoù-bevañ. E gwirionez ez eo liammet an holl abegoù-se.

Diouennadur ar bizoned a zo da lakaat er penn kentañ tout. Soñjit 'ta ez eus bet lazhet 3 700 000 bizon etre 1872 ha 1874, diwarno 150 000 hepken

gant an Indianed. En abeg da se ez eas an Indianed war baouaraat hag e teujont da vezañ sujetoc'h-sujetañ d'ar boued roet gant ar re wenn.

Ar poreoù* a oa bet spontus : ar vrec'h dreist-holl, met ivez ar c'hohlera hag a bep seurt terzhiennoù degaset gant ar gerwerzhourien hag an draperien wenn.

Er mirvaoù, disoc'h ar brezelioù kollet, en em lezas ar pobloù da vont gant an dic'hoanag. Mat eo gouzout ivez n'eo ket bet kollet gant Indianed-zo hengounioù-zo a-drugarez d'ar mirvaoù e-lec'h ma oant gwarezet tamm-pe-damm diouzh ar sevenadur gwenn dre ma choment buzet kenetrezo. Burev an Aferioù Indian eo an hini a ras war-dro ar mirvaoù.

— Da gentañ e oant divroet e douaroù falloch ha kalz bihanoc'h eget o re.

— Da eil e oa difennet dezho brezelin, ar pezh a zegasas fin ar c'henvreuzioù, difennet e voe ivez Dañs an Heol.

— Ar wazed a veze klasket o lakaat da droc'hañ o blev, un arouez a c'hourelezh* koulskoude.

— Ret eo bet dezho deskiñ labourat an douar, ober droug d'o Mamm Douar en ur ervenniñ. Poan o doa o kompren ivez ster perc'henniezh an dachennañ-tachenn gant hemañ-hen : evito e oa an douar d'ar gevredigezh a-bezh.

— Alies e veze tennet o bugale diganto evit o c'has d'ar skol.

— Binvioù na ouezent ketober ganto a veze roet dezho, ha pa veze displeget o zalvoudegezh e tis-koueze darn eus an traoù-se bezañ diezhomm-kaer.

— An natur a rae diouer dezho. Ha pa oant naet gwechall e teujont da vezañ tud lous; e-giz-se e c'halle ar c'hlevedoù en em zispakañ hag en em ledañ.

— An alkol a oa aes da gavout ha distrujet e voe evel-se bri an Indianed ha kalz a vuhezioù. Hiziv an deiz e chom bepred an alkolegezh ur gudenn vras, an hini vrasañ zoken.



pore : kleñved-red spontus gourelezh : perzh ar baotred



An Indianed hiziv an deiz

Bez' ez eus kement a zoareoù da vezañ Indian hag a bobloù indian, ha marteze ouzhpenn.

Kregiñ a reer da venegiñ ar mennozh a "Red Power" (Galloud Ruz) goude taolioù an A.I.M. (*American Indian Movement* - Emsav Indian Amerikan).

— D'ar Sul 9 a viz Du 1969 ec'h aloubas tud an A.I.M. enez Alcatraz (ne oa den ebet ken o cham warni dre ma oa bet dilezet an toull-bac'h brudet a oa eno).

— E dibenn miz Gwengolo 1972 e voe aozet ur gerzhadeg vras anvet *The Trail of Broken Treaties* (Gwenodenn an Emglevioù Torret) hag a echuas gant dalchadur ti Burev an Aferioù Indian e Washington (d'ar Yaou 2 a viz Du 1972). Er bed a-bezh e rae berzh mat an taol-se.

— E-kreiz goañvezh 1972-73 e padas 70 devezh seziz Wounded Knee gant ar boliserien. Daou Indian ha daou boliser en holl a voe lazhet. Outo e talc'he penn emsaviñ an A.I.M. a oa bet tapet gouestlidi ganto. Fellout a rae dezho e vefe dispennet ar gouarnamant siou ha gortoz a raset e vefe rentet dezho stadoù Dakota an Norzh ha Dakota ar Su ha lodennoù bras eus ar Wyoming, ar Missouri hag an Nebraska. Ne voe heul ebet d'an taol-se : daoust ma oa bet lezet an Indianed da dec'hel ne reas ar Stad nemet reiñ muic'h a arc'hant-skaozell d'ar mirvaoù.

Koulskoude eo chomet tud an A.I.M. un dregantad bihan eus an holl Indianed en abeg d'o dispac'helouriezh ha d'o falioù sorchennus. Russel Means eo penn brudetañ an emsav-mañ.

E deroù ar c'hantved ez eas kenstagded ar pobloù un tamm da get, ar pezh a voe penn-kaoz ouzh an niver bras a zimezioù gant tud wenn hag a harluoù d'ar c'héριοù bras. N'eus dazont ebet hiziv an deiz evit an Indianed nemet dre ar pobloù e vefe hag ar meuriadoù.

*

An hêrezh diwar an Indianed

Un nebeud troioù-lavar a blij d'ar vugale ober ganto, evel-dizouarañ ar vouc'hal-vrezel-pe c'hoazh «butunat korniad ar peoc'h» h.a. Digant an Indianed eo bet desket gant an draperien hemolc'hiñ hag en em

zibab en natur. Ar maiz, an avaloù-douar, ar butun, ar c'hraoù-marmouz, ar yer-Indez, ar c'houlour-drennoù, ar c'hougourved (ar c'hourjetek), an tomatez hag a bep seurt gouennoù fav, setu aze al listennad traoù hon eus desket gounit a-drugarez da annezidi gentañ Amerika.

Kalz a c'héριοù indianek ivez a zo bet tremenet en hor yezh : mokasin, totem, kanoe, skalp... Lod all o deus roet o anv da stadoù : Kansas, Iowa, Nebraska, Indiana (n'eus meuriad indian ebet ken enni)... pe da géριοù : Sioux City, Cheyenne, Wichita, Omaha, Chicago, hag all.

Ar c'hoari *La Crosse*, evel an holl c'hoarioù horell, en deus levezonet c'hoarioù all.

Arabat ankounac'haat ez eo un tammig diwar skwer an Indianed eo bet perzh ar veuriadelezh en hor c'hevredigezhioù, da lavaret eo spered ar meuriad evit en em zifenn ouzh an digenvezded hag an unvanadur.

A-drugarez da livourien bet bevot ganto e-touez an Indianed (Karl Bodmer, George Catlin...) ha da luc'hskouderien (*shadow catchers* - akraperien skeudoù) (Will Soule, Edward S. Curtis...) e chom taolennoù kenedus eus buhez an Indianed.

*


Ar pobloù

Diwar an 300 pobl bennak a chome er Stadoù Unanet e 1978 ne oa nemet 75 anezho hepken o doa ur boblañs en tu-hont da 250 den. Ar re all zo o vervel tamm-ha-tamm evit an abegoù bet gwelet c'hoazh uheloc'h : an harlu, hag ivez an dilabour, ar c'hwiberezh, skign pobloù-ze strewet a-gleiz hag a-zehoù war meur a virva (ar Sioued da skwer), ha dreist-holl an alkol.

War kartenn ar mirvaoù e verzer ez eus bet bac'het ur bern pobloù en Oklahoma (an "Douar Ruz"). Eno, n'eus nemet an Ozajed (a-drugarez d'an eoul-mañ) a gement a zo deuet a-benn da dennañ gound eus an douaroù paour roet dezho. Er c'héριοù bras e kaver darn eus ar re all, mesket gant tud wenn niverusoc'h egeto; bevañ a reont kalz diwar an douristelezh, ar mirdioù; deuet eo o sevenadur da vezañ afer ar c'helc'hoù indian.



KARTENN AR MIRVAOÙ ER STADOÙ-UNANET



- Mirvaoù e-lec'h ma'z eus Indianed eus ar C'hompezennoù o vevañ
- Mirvaoù evit pobloù all
- Mirvaoù bihan



Setu amañ dindan Indianed an Oklahoma a oa o vevañ er C'hompezennoù (sifroù war-dro 1978) :

Komanched (1)	3 305 den	— eus ar c'horn-bro-se.
Kiowaed (1)	3 300 den	— ar re-mañ ivez
Cheyened (2)	1 800 den	— a-orin eus an Dakota hag ar Montana
Arapahoed (2)	1 600 den	— a-orin eus ar Minnesota
Ponkaed (1)	1 560 den	— eus ar Minnesota hag ar Wyoming
Kapaoed (1)	1 285 den	— a-orin eus an Arkansas
Pawnied (1)	1 010 den	— a-orin eus an Nebraska
Otoed (1)	980 den	— a-orin eus ar Missouri
Soked ha Foksed (2)	935 den	— a-orin eus ar Michigan
Wichitaed (1)	470 den	— eus ar c'horn-bro-se
Iowaed (2)	133 den	— eus an Iowa, an Nebraska ha Kansas
Tonkawaed (1)	40 den!	— a-orin eus an Texas

(1) Neus ken anezho nemet en Oklahoma.
 (2) Meuriadoù anezho a zo e lec'h all.

An douristelezh

Pouezus eo evit ekonomiezh ar meuriadoù (lod ne revont tost nemet diwar an dra-se ha diwar an arc'han-t-skoazell roet gant ar Stad).

E-touez ar c'hinnigoù pennañ emañ ar mirdioù bihan, an abadennoù tan-ha-kurun, an hentoù bet treset gant dizoloerien brudet evel Lewis ha Clark, Kit Carson, h.a. Brudetoù c'hoazh eo ar mirdioù broadel : ar *Smithsonian Institute* e Washington D.C., ar *Gilcrease Institute* e Tulsa en Oklahoma, ar *Museum of the American Indian* e New York, an *Heard Museum* e Phoenix, kêrbenn an Arizona, an *Institute of the American Indian* e Santa Fe hag ar *Field Museum* e Chicago zo skwerioù anezho.

Ar gouelioù bras a ro ivez tro d'an Indianed d'en em gavout etrezo : foarioù (*fairs*) gant dibunadegoù liesliv, *pow-pow*où, rodeoioù, lidoù relijiel hagistorel. Embannet a vez bep bloaz gant Burev an Aferioù Indian un deiziadur a vez kavet warnañ deiziadoù an emgavioù brasañ : an *American Indian Calendar*.

Tu a vez da lojan e-barzh "motelioù" perc'hennet ha dal'het gant Indianed; un toulladig anezho zo cheuc'h zoken : dremmwelioù brav-meurbet, salioù-kendalc'h, sportoù kran, kinniget e vez a-wechoù abadennoù hemolc'h gant anaouderien, tipioù evit kousket...

An traoù a zo sañset bezañ arzel hag a brener er stahioù bras zo peurliesañ vil ha graet (e Hong Kong, Singapura pe me 'oar-me!) evit an douristed. Gwelloc'h eo prenañ war-eeun digant an dornwer-

zhourien ; kaeroc'h (ha keroc'h na petra 'ta), ben-goueloc'h eo oberennoù an artizaned hag ouzhpenn-se e c'heller kaozañ ganto.

Taolit ivez ha fell deoc'h gweladenñ mirvaoù : tu zo da vezañ degemeret eus ar c'hentañ gant meuriadoù-zo koulz ha bezañ skarzhet gant reoù all. Ar reollenn da heuliañ zo evel-just an doujañs, hogen arabat eo c'hoari re an dudoniourien pe ar re o deus truez outo : re a dud eus ar seurt-se o deus da c'houzañv; mat eo gouzout ivez ne reont dre vras diforc'h ebet etre Europiz hag Amerikaned ; gwenn int ha mat pell zo.

Ar politikerezh

Dre vras o deus an Indianed, hiziv an deiz, div vroadelezh : an hini amerikan ha hini o fobl.

E 1924, evit ar wech kentañ, e krog ar Stadoù da reiñ dezho ar gwir da zilienn, hogen e-pad ur pennad ez eus chomet kalz anezho hep ober dre zisñf pe dre ma ne gredent ket er gounid a c'hellfent tennañ evit ar gwir nevez-se; bremañ avat o deus ur pouez politikel a zo ret d'ar bolitikourien ober gantañ. Ral a-walc'h eo en em ginniget ha raloc'h c'hoazh e vefent dilennet. Setu perak e c'heller menegiñ anv Ben Reifel, ur Siou bet kannad peder gwech e Kambr ar Gannaded e Washington.

D'an hevelep barmerezh ha hini ar Re Wenn ez int sujet nemet evit an torfedoù dister o deus lezioù-barn dezho o-unan en o mirvaoù; hag er mirvaoù-se e lez dre vras ar cherifed o galloud d'ar polis indian.

An hevelep tailhoù a vez paeet ganto ivez daoust ma weler alies a-walc'h meuriadoù disammlet eus an dra-se a-drugarez d'un emglev bennak. Ha dav eo



lavaret n'eus ket eus an tailhoù gladel war ar mirvaoù.

Souezhusat traoù ar re a zo da heul!
- Ar gevredad Indian Claims Commission, krouet e 1946, zo he roll resteleur d'ar pobloù priz an douaroù bet laeret diganto diwar terrin un emglev, pep kantarad o talvezout war-dro \$1, ar pezh en deus degaset milionoù d'an Indianed.

- E-pad ar brezel '14 ez eas 8 000 Indian da soudard ha 25.000 all a oa en em ginniget evit an eil brezel-bed a-raok ma vefe engalvet an holl. Ha bremañ, o tel'her kont eus brezelioù Viêt Nam ha Korea, e konter war-dro 70.000 brezelour kozh.

Burev an Aferioù Indian, ar B.I.A., en doa gwechall brud fall. Ne seblant ket bezañ gwelloc'h hiziv an deiz, padal ez eus muioc'h-mui a Indianed ennañ (hag er penn) ha labourat a reont evit tapout arc'hant-skoazell ha difenn an douaroù, met n'eo ket a-walc'h hervez ar re a ra diouto gant lesanvioù evel *Uncle Tomahawk* pe c'hoazh *Apples* ("avaloù"), da lavaret eo ruz en diavaez hogen gwenn en diabarzh.

Ar c'henaozadurioù er Stadoù-Unanet a zo :
- An A.I.M. (*American Indian Movement*, Emsav Indian Amerikan), taer a-walc'h, pennoù brudet, Russel Means ha Dennis Bank. Ne resevont gwenn ebet digant ar Stad.

- An N.C.A.I. (*National Congress of American Indian*, Kendalc'h Broadel Indianed Amerika), arvez-tre hag agoulennus, Vine Deloria zo bet en e benn.

- An N.I.Y.C. (*National Indian Youth Council*, Kuzul Broadel ar Yaouankizoù Indian), yaouankiz an N.C.A.I.

- al *League of Nations* (Kevredad ar Broadoù), hengoulour ha kreff-mat, arvez ivez met stag

ouzh buhez ar meuriadoù.

- An N.T.C.A. (*National Tribal Chairman Association*, Kevredigezh Vroadel Prezidanted ar Meuriadoù), tost-tre d'ar B.I.A. ha dre-se, ouzh an arc'hant-skoazell.

- An *Native American Church* (Iiz an Indianed) a gemer muioc'h-mui plas ar relijion gristen er mirvaoù.

Ar mousfent indian

Peurliesañ e vez gwelet er westernioù Indianed saouzanet ha yen o dremmoù gwir eo ne vez ket dre vras peadra da c'hoarzhin evito; met koulskoude ez eus kalz a fent ganto. Plijout a ra dezho, dreist-holl, ober goap ouzh alouberien o douaroù, ar re wenna.

Setu un nebeud skwerioù :

- Ur bladenn-nij o touarañ dirak un Indian : "N'eo ket gwir! Ket ni, dizoloet omp bet ur wech c'hoazh!"

- Da geñver bannadenn gentañ ur fuzenn waru al Loar e c'houlennas ur c'hazetenner gant un Indian pesurt kannadur e rofe da annezidi al Loar ma vefe anezho. Respont an Indian a voe sirius : "Dreist-holl na sinit netra gant an dud-se!"

- Un nebeud bloavezhioù zo e oa bet pedet pennoù apsarok da vont da vro Alamagn gant Indianourien eus ar vro. E dibenn ar friko, 300 den ennañ, e teuas poent ar goulennoù hag en o zoez un nebeudig diwar-benn ar skalpoù. Neuze e tennas ar penn Eln Du (*Black Elk*) skalpoù du ha melegan eus e c'hodell, ha d'an Alamanned a oa c'hoant ganto gouzout hiroc'h e lavaras en ur c'hoarzhin (tommet-mat e oa) e oant bet difelpennet gantañ diwar pennoù 7 ofisour alaman e-pad ar brezel diwezhañ, berraet e voe ar banvez.

Plijout a ra dezho ivez c'hoari gant ar statitikoù, ober goap eus Custer hag eus an douristed evel-just.

Levrlennadurezh

Daniel Dubois hag Yves Berger, *Les Indiens des Plaines*, Dargaud; Jean Raspail, *Les Peaux-Rouges Aujourd'hui*, Flammarion; *Les Indiens*, Time-Life; William Camus, *Mes Ancêtres les Peaux-Rouges*, La Farandole; Georges Frenval, Jean Marcellin ha Guy Michel, *La Fantastique Épopée du Far-West*, Dargaud; *Pieds Nus sur la Terre Sacrée*, skeudennet gant Edward S. Curtis ha frammet gant T.C. McLuhan, Denoël

Skeudennadurezh

Christian Barthelmeuss, Coffrin's Old West Gallery, Miles City, Montana; Rann al levrioù ral, *Levrmaouez-keñ* New York; L.A. Huffman; Mirdi Amerikan an Istor Naturel; *Malo ar Menn*; Robert Duperrier, Paris; *Malo ar Menn*; Smithsonian Institute; kartenn hervez *Les Peaux-Rouges Aujourd'hui*.

C'HOANT... C'HOANT 'M BEFE DA LABOURAT EN-DRO. EZHOMM 'M EUS TAMMIGOU ARC'HANT EVIT PRENAN LAEZH.

LABOURAT... TU ZO DA ESAEAN... MA NE C'HOULENNEZ KET RE, ANAT DIT.

N'HOUAN KET KALZ... KEN NEMET UR BANNE LAEZH HAG UN TAMM KEUZ BENNAK.



HA BEP BEURE EZ RE D'AR VOUREL'H O TEGEMER HEP GINAN AL LABOURIOU ROET DEZH! DA OBER.





GANT HE LABOUR, PEMDEZIEK E TEVAS-HI A-BENN DA VAGAN MAT A-WALC'H DAVID VIHAN, GOUDE E KLASKAS E ZESKIN DA GOMZ. MET BRAS E VOE HE SOUEZH PA WELAS NE ZEUE GANTAN NEMET UR CHUCHUMUCHU DIHEGLEV. HA KEN ANER ALL E VOE HE LABOUR. PA GLASKAS E ZESKIN WAR DRADU ALL : NE ZEUE KET A-BENN DA DREVEZAN AR JESTROU PEMDEZIEKAN ZOKEN.



AR C'HAEZH VAQUEZ NE GOMPRENE NETRA, KREDET HE DDA E TEUJE DAVID A-BENN D'EN EM ZIBAB UN DEIZ BENNAK. BREMAN E DA FINAT DEZHI NE ZEUE KET A-BENN, DROUST DEZH OBER WAR E DRO GANT HE HOLL C'HARANTEZ.

MONT A REAS AR BLOAVEZHOU HEBDOU, SIGUL A-WALC'H, PETRA BENNAK MA DA RELOU BREZEL GANT AR FOLLAJKOU ANNEZEL.



NE DA KET CHENCHET DAVID VIHAN, KOUZ LIHARET, DROUST MA WELED WARNAV AZONDU KLENNEDOU DOUAREL AR MARC. E ZREMA A DA RONT EVEL HINI UR BABIG, MET DISKROC'HEMENN A RAE A-DAKADOU.



FARDIN A RAENT A-VANDENNADOU EN UR WASTAN KER HA LAZHAN HE ANNEZIDI.



EN O PENN E DA UNAN ANNET GWALLGALON, BET SOUDARD SKLERJENN, ROUANEZ KERZIROLL, TEC'HET DIOUZH HE LU HA BOUNEZET BRUD UR PREIZHER DIOKUEZ, DROLLET E DA HOLL NERZHOU AN IFERN WAR GER.



EDO GUENN O VAESA DEVED NEPELL DIOUH KER.
TROUZ AN EMGANOÙ A ZEJAS BETEK ENNI HA
KOMPREN A REAS E OA UN DRA BENNAK DIRIJA
O C'HOARVEZOUT.



MA DOUE! TAN HA LAZH ZD E
KER... MARD A AR SOUDARDED
D'AR C'HARTERIOU DILEZET
EMAN DAVID WAR VAK E VUAZ



GUENN N'HE DOE KET AMZER DA MONT DA ADKAVOUT AR C'HEMMAD BIHAN. LAZHET E VOE WAR
HENT AN DISTRO GANT UR GEDOUR DIGENVEZ. MONT A REAS HE SONJ DIWEZHAN GANT DAND,
AR C'HROURDUR BIHAN EN DOA ROET TALVOUDEGEZH D'HE BUHEZ.



AR BUGEL, E-UNAN-PENNI BREMAN, A ZEJAS A-BENN D'EN EM SILAN ER-MAEZ. SAMMET E VOE GANT UN
EUZHASKELL. M'HE DIJE GUENN BEVET PELLOC'H HE DIJE DIVINET MARTEZE... RE ZIWEZHAT E OA AVAT,
HAG AR WIRIONEZ A OA E... LEC'H ALL, PELL, PELL AR PELLAN...





EN EGORAMZER...
GWAHDON!... GWAHDON!
SIONTUS EO!



PETRA A C'HELL BEZAN
SIONTUS EN HOR. BED
KLOZ-NI, YOURI VIBAN ME
??



UNAN EUS AR VUGALE EN DEUS LAKAET AR
BELLGAEZEZ DA VONT EN-DRO
HEF GOUZDUT DEZHAN, PELGAEZ
EO DRE AN EGOR. ?! SIONTUS EO!



PETRA!!



DIFENNET-GRONUS 'M BDA MONT ER
SAL SE! PENNOS EO AET TRE ?




HA PELEC'H EO BET ADARNEZENET?

AR SKRAMMOU A
EMBRAN ANV UR BLANE
DENN ANVET DOLAR.
SANT HE ANVEZ DI.



SIONTUS EO! DEK GWEZH
BERROK'H EO BUHEZ DOLARIZ
EGET HON HINI. NE GOMPENIT
RET HAG E LAZHAN A RANT!



DIV EO DIN OBER UN DRA BONNAK
KOUSIET A GOUSTO, E-KEIT HA
MA CHOMO UN DISTERIG CHANS.
E ADKAVOUT A RIN, HA PA RANKEN
FURCHAL AR C'HAST A BLANEDENN
-MONT PENN-DA-BENN... M'EN TOU!

War ribl ar pleg-mor

Paol ar Meur



UR c'hrouadur bihan e oa eus Lanig pa reas e dad e vennozh da guitaat Louisbourg, da dreizhañ al lenneier, a-benn redek koadeier an Uheldirioù, e kornôg Enez ar Roue. N'en doa mui soñj eus straedoù tudek ar porzh a oa bet ganet ennañ, ur geoded ramparzhet pinvidik savet gant an drevadennerien en doa kaset ar roue Loeiz da Kanada evit pouezañ Bro-C'hall a voru. Kaer furchal en e eñvor ne zeue ket a-benn zoken da skeudenniñ en e spred an ti edo o chom ennañ a-raok tremen-van kriz e vamm. Afer taolenniñ deoc'h, lenneierien, e souezh pa zistroas ar c'hrennard e oa deuet da vezañ, da gêr e amzer gentañ. Paneret huchadennoù e dad e vije chomet, digor e c'henoù war nav eur, da vamiñ ouzh al listri ramzel er bae, ouzh al lojamantou mein-ben, ouzh lifredoù an ofiserien, ouzh dilhadoù kaer ar veurc'hizien. Arabat e oa stranañ. Gertozet e cant e ti ar gouarnour. Estreget urzhioù e dad a lakae Lanig en ur chif bras. Kaer digeriñ e zivskouarn ne intende ger ebet e langaj ar gêriz. Genidik eus Bro-Leon, e teue dalc'hmata e dad outañ e yezh ar Yretoned. O yezhañ ne oa nemet gant Indianed en ead gantañ en doa c'hoariet e-doug e vugaleaj e don ar c'hoadoù, n'en doa biskoazh desket Lanig an disterañ lavarenn c'hallek.

Aet skuizh o chaseal dre an toleadoù gouez, e oa bet dedennet e dad gant kinzig ar gouarnour. Dre ne oa ket strujus a-walc'h parkeier Enez ar Roue evit tennañ diouto peadra da gargañ taolioù annezidi niverus Louisbourg, e klaske ar gouarnour gounidien galonek evit difraostañ, evit hadañ douar ruz Enez Sant Yann. Degeneret e voe al Leonad en o zouesk.

Heoliet pullh e oa ar mor pa zegouezhas ar vag a oa Lanig hag e dad en he bourzh, rag-enep da devinier izel Enez Sant Yann. Kerkent ha diskennet e Port La Joye, e krogjont da boaniañ a-lazh-korf. E seizh gwellañ a reas ar c'hrennard evit reiñ skor d'e dad da derriñ tirien. Start e voe ar vuhez. An holen, an had a rae diouer. Eostou zo a voe distrujet gant al logod.

Ret e voe da Lanig en em lakaat war ar galleg. Dre ma ne zeue ket brav ar yezh-se gantañ, e veze alies Jean Grandsentier, mab henañ e amezeien, o c'hoari goap warnañ, ken ma save mezh dezhañ. Ne voe ket pell Lanig o rebechiñ d'e dad hezañ savet anezhañ e-touesk an dud c'houez.

"Tennañ a ri gounid abred pe zikezhat diouzh an amzer ac'h eus tremenet ganto", en doa respontet al Leonad d'e vab, di-
frou e vouezh.



Ur mintinvezh hinon, e fuzuilh gantañ a-dreuz skoaz, e sankas Lanig er c'houdad sapin a c'hourize edegi e dad. Evel ma ne blijie netra dezhañ evel ar chase, e save alies kerkent ha gouloù deiz a-benn redek war-lerc'h ar jiber a-raok stagañ gant e zevezh labour.

Skourradoù glav a oa bet etre daou benn an noz ha gwazhiou-dour a-liv gant ar gwad, liv douar an enez, a rede dre ar gwenodenoù. Edo ar c'hrennard o vukañ beg e arm war un houad o nijal kuit pa voe sachet e evezh gant mouezhiou boud. Ha Lanig da skeiñ raktal, didrouz kaer, war-zu al lec'h ma teuent. Spurmantiñ a reas daou Indian o kaozeal kenetrezo e-kreiz ur frankizenn, bantet o selloù karget a ziskred war un den yaouank a oa seizet e izili gant ar spont, ken na oa ket evit en em sachañ. Anavezout a reas Lanig

Jean Grandsentier, ar godiser a skloke da c'hoarzhin seul wech ma strive da c'hallegañ. Deuet e oa ar c'houz da reiñ e gemend-all d'e amezeg diseven.

"Arabat klask trabas outañ, n'eo ken ur bugel dizifenn!" a lavaras Lanig e yezh an Indianed en ur zifoupañ diouzh ar bod a oa kuzhet a-drekañ.

"Ur bugel!" a daolas un Indian, souezhet. "Tres ur gwaz zo warnañ evelato."

"Ha peadra a vefe d'ur gwaz spontañ e-giz-se?" a atersas Lanig.

Uhel e tarzhas c'hoarzh an Indianed. Ne gredas mui e amezeg rebechiñ da Lanig e vrishyezh betegouzout ma tanevellfe d' an holl e gejadenn ouzh daou chaseour eus ur neuriad Mikmak a skoulme darempredoù mat gant an drevadennerien abaoe o donedigezh er vro...



biskoazh kement all !...



DROUKLAZH AR PREZIDANT LINCOLN HA HINI AR PREZIDANT KENNEDY un heuliad kendegouezhioù souezhus...

Abraham Lincoln a voe anvet da senadour evit ar wezh kentañ e 1846 ; John Kennedy kant vloaz rik war-lerc'h. D'ar 6 a viz Du 1860 eo e teuas Lincoln da vezañ 16^{em} prezidant ar Stadoù-Unanet ; d'an 8 a viz Du 1860 e voe tro John F. Kennedy da zont da vezañ prezidant, ar 35^{em}.

Goude o marv ez eo daou zen eus su ar vro eo a gemeras o lec'h, hag o-daou a oa Johnson o anv : Andrew Johnson, ganet e 1808, ha Lyndon Johnson, ganet e 1908.

John Wilkes Booth, muntret Lincoln, a oa ganet e 1838 ha Lee Harvey Oswald, lakaet da vuntret Kennedy, e 1939. Eus su ar vro e oant genidik o-daou ha lazhet e voe an eil hag egile a-raok bezañ bet barnet.

Devezi e varv en doa Lincoln lavaret da unan eus e wardoù : "Me'gavdin ez eus tud o klask ma lazhañ... Ha sur on e rañt... Mard eo ma zonkad n'heller ket miret ouzh se."

Kennedy, diouzh e du, en doa lavaret d'e wreg ha d'e guzulier : "Ma vefe unan bennak, eus



Er Ford's Theatre eo e voe drouklazhet Lincoln ha Kennedy a oa e-barzh ur c'harr — ul Lincoln ! — deuet er-maez eus ar Ford Motor Company.

Un dra all evit schuiñ : sekretourez Kennedy he doa klasket ken he doa miret ouzh Kennedy a vont da zDallas (ar gêr e-lec'h ma voe muntret) ; hec'h anv a oa Evelyn Lincoln !



ur prenestr bennak, a venne ma lazhañ a-dennou-fuzuilh, den n'hellfe miret outañ. Perak bezañ trubuilhet gant se neuze ? Un nebeud eurvezhioù diwezhatoc'h e voe lazhet ar prezidant Kennedy. Lincoln ha Kennedy a oa o-daou difennourien touet gwirioù an dud. Lazhet e voent, o-daou, d'ur Gwener hag o gwreg a oa en o c'hichen ivez bep tro.

● Burevioù ha kannaded Europa. Setu aze tud hag a oar labourat. Dre vras zoken e labouront e-pad an noz. Setu ar pezh a c'hoarvezas adarre un nebeud miz-vezhioù zo e Brussel. Danvez al labour : peseurt kementad a artichoad a c'helled emporzhañ eus ar broioù a anver A.K.H. (Afrika, Karaibez, Mor Habask). Ne zeu ket a-benn ar gannaded d'en em glevet. Darn moarvat a glask difenn lod Leoniz ha Gouelaouiz en afer-se. Goude un hir a nozvezh digouk e taolas pled, beureik, unan anezho, ne veze ket gounezet artichoad gant ar broioù-se !

● Betek-henn e kreded ne oa nemet ar vein a c'helle bezañ magnetek war an douar: setu ma'z eus bet dizoloet e su bro Alamagn bakteriennou a oa magnetet en un doare naturel.

● Kavet ez eus bet pemp maen o tont eus al loar war an douar. N'eo ket mein bet degaset gant sterdeidi ur veaj Apollo bennak. Naren, hogen pemp maen kouezhet war

an douar 100.000 vloaz da nebeutañ da heul ur stokadenn etre al loar hag un oablvaen. En Antarktika ez int bet dizoloet.

● Bezomp sart, drev, seder, drant ha bagol ! Hervez un enklask (sirius) bet kaset da benn gant mezeien ez eus bet prouet e veve pelloc'h an dud laouen. Tudu, na chaokit ket ha na vagit ket soñjoù du !

● Lezennoù droch ? Er Michigan (U.S.A.) ez eo difennet hervez al lezenn kousket e-barzh ur gibell hag e Pennsylvania ez eo difennet-groñs kousket e-barzh ur yenervez...

Er Chansas n'heller ket mont war vul e miz Eost hep tog-plouz en e benn ! En Idaho e vezer kastizet ma pesketaer krapet war gein ur jirafenn.

Hag en Nebraska ho po un dell-gastiz da baeañ ma tistrevit dirak an dud !

GONERI GERSAZON

...EUREKA!

Gerioù! (p.9)

• Evel petra?

Skragn evel ar bleiz
Gwiv evel ur c'hant tachou
Du evel ur vouarenn
Fin evel ul louarn
Bouzar evel ur c'hleuz
Lart evel an toaz

• Al lizherennoù a vank

1. SODENN
2. ROZENN
3. TONENN
4. NOTENN
5. MOJENN
6. LODENN
7. BODENN
8. BOSENN
9. BOLENN
10. POTENN

• Ar silizherenn

Ar G
LOUET a ro GOUEL a lez T a ro TREID (DREIN) a ro N a ro RADEN (DARED) a lez D a ro LEDAN (PLAEN) a lez P a ro PADAL (LAGAD) a lez G eta.

An Torr-Penn (p.12)

1. 256 (16 x 16)
2. 31 (0 1 2 / 10 11 12 / 20 21 22 / 30 31 32 / 40...)
3. 24 (0+1+1=2; 1+1+2=4; 1+2+4=7; 2+4+7=13; 4+7+13=24;
4. 3 gwech 1, 4 (gwech) E, 1 (wech) O, 2 (wech) B a gaver el linenn! Mankout a ra eta un "E".
5. 13 (5-3=2 / 6-4=2 / 12-8=4 / 20-7=13)
6. G [lenn 2 lizherenn ha 2 lizherenn met war an tu c'hontrol] : OI = KO, ZM = MZ (neuze OKZM = KOMZ), ar pezh a ro KOMZIT BREZHONEG
7. 4 [ret eo lenn 3 sifr ha 3 sifr, an hini kreiz e vezañ sammad an daou all : 12 16 4 (16 = 12+4) h.a.]
8. O K D E N M A A V T O = KENAVO + DEMAT
9. 29 [ar pemp departamant]
10. 5 [o lenn 3 lizherenn ha 3 lizherenn : U 1 N (1 zo etre lizherenn gentañ ha lizherenn ziwzehañ ar ger "un"), 2 zo etre D hag U = DaoU; 3 etre T hag I = Tri, h.a.]
11. V [ur genosenn zo heuliet gant K (kenosenn), ur vogalenn gant V (vogalenn) : A v F k B k...]
12. S : evel-se ez eus tu da lenn an hevelep heuliad o kregif gant an deroù pe gant an dibenn, an L e vezañ al lizherenn greiz.
13. N : lakaet e plas pep lizherenn al lizherenn a zo d'he heul en urzh al lizherenneg : K zo bet lakaet un L en he flas, D un E, Z un A, h.a. Lenn a reer neuze : **Lennit Talabao** !
14. 3 (4-2=2; 9-3=3; 8-4=2; 6-2=3)

KORN AR FRI-FURCH

Anton a respont d'ho koulennoù

Pezhernezh peotr al lizheroù ! Kement e c'houlennet e gavis din ma'n deus kavet gwelloc'h diouzh ar labour...



Ne vev, rak ur gwelenn a oa maet e-istidh abaoe an taol all. Hemañ, kaset gent ur peotr d'ha nos gwelenn ar von (Ostevred) mar lennen mat, avel Coanvez P...



«En deiz all van bet er sinema hag en ur dremor dirak ar skramm en eus tallet pled e oa leiz ar skramm a duallioùgù bihan. Purak ha!»






Ain, anezh n'eo ket. Gwelenn a res, ma faer bihan. Kor-rus e kaset danvez ar rak romen sa. Pa vez tallet dibellañ ar skramm, evel-se eo eus nebeutoc'h a zavez ha marz'hadmetoc'h a ne ez eo...



Kement-se zo allier evel lagad en euzer... He gwelenn ha da vev d'ur sinema, ho sell ouzh ar filmoù e-lec'h tallet ouzh ar skramm...

JOBIG



(embannet gant aotre hegarat Evit ar Brezhoneg)

Talabao, embannet gant An Here, straed Gay-Lussac, Kergleuz 29480 Ar Releg-Kerhuon. Karget eus an niverenn-mañ : Alan Dipode ha Divi gKervella. Priz ar c'houmanantoù : 120 lur evit 6 niverenn ; koumanant-skoazell, adalek 150 lur ; evit ar broioù estren, 150lur. Savit ho chekenn war anv An Here. Disklêriet hervez al lezenn c'hall, Genver 1991. Lezenn c'hall 49-956 ar 16-07-1949 a-zivout an embannadurioù evit ar yaouankiz. Lakaet er moull e ti gKloatr, mouller e 29800 Sant Tonan. © An Here 1991 evit an holl bennadoù. Graet e Breizh.